

---

**An Tadou hag ar Mammou**  
**DIVAR BEN AR SCOLIOU**

— — — — —  
Var don *Mission Pluguën*  
Pe *Ni ho salud, Stereden vor.*

— — — — —  
1

Kristenien vad a Vreiz-Izel,  
Zo bet a viscoas tud fidel,  
D'ober miret lezen Doue,  
A sevel mad ho bugale.

2

Hirio, tadou, mammou kristen,  
Tud difeiz a glask eul lezen,  
Evit cas cuit Relijuset,  
Gant pere, ez 'oc'h bet desket.

3

Gant tud hep feiz hac hep Doue,  
Fel d'he 'tesfac'h ho pugale,  
Ma vezint evel d'ho difeiz,  
Da vressa 'nn urz vad hac ar reiz.

4

Set 'aze Revolution !  
O clask discar Relijion,  
O tenna digant mam ha tad,  
Ar guir da choaz mistri d'ho map.

5

Mes, c'houi tadou, mammou kristen,  
Zavo buan d'en em zifen,  
Enep lezen digoustians,  
Ne verit nemet dismegans.

6

Ni Breizadet c'houlle frankis,  
Evit kelen hor iaouankis,  
Ni a scolio hor bugale,  
Gant mistri a zoujans Doue.

7

Lezit ganeomp hor jesuïtet,  
Rac gant ann oll ez int caret,  
Hor bugale 'z a d'ho scoliou,  
Hac hon-unan d'ho zarmoniou.

8

Merc'het, goazet zoken seder,  
'Z a d'ho Retret e Ti-Kemper,

Da voalc'hi ho c'houstiansou,  
Ha trec'hi mad ho goal-ioulou.

9

An tadou deomp zo mignounet,  
Liez gueich deuz hor zicouret,  
Pa brezgent 'nhor parechou,  
Oc'h ober deomp misionou.

10

Tud fallacr fell d'he hor c'helen,  
Ha cass cuit menec'h, beleien,  
Ober c'hanomp franmasonet,  
Miret na vemp catoliket.

11

Mes, ni evel guir Vretonet,  
'Gendalc'ho d'hor Relijuset,  
Ni gar bepret hor beleien,  
Zo bet a viscoas hor zouten.

12

Ni zalc'ho ato d'hor Freret,  
Rac gantho ez omp bet scoliet,  
Int a<sup>^</sup>ra scol d'hor bugale,  
Ho zav hervez lezen Doue.

13

Ni zalc'h ive d'hor Seurezet,  
Hor merc'het gantho ve desket,  
Desked mad vent da labourat,  
Ha da blega d'ho zud timad.

14

Seurez 'gant paour a zo caret,  
A zoken gant hor zoudardet,  
He c'hask en Hospitaliou,  
Da louzaoui ho gouliou.

15

Lavarit c'hoaz ez euz e Frans,  
Tud difeiz, a c'houllen dichans,  
Da dud, a ra kement a-vad,  
D'ar re n'o deuz na mam 'na tad.

16

« Perac, e me Relijuzet  
« Cass cuit Leanet, Leanezet ?  
« Ni glask sevel ho pugale,  
« Ober vad d'ann oll 'n hor bue. »

17

Neket avad ar Vretonet,  
A glask cass cuit Relijuset,

— « Ar re-ze zo tud dizoue,  
« Enebour deomp, d'hor bugale.

18


« Ni tud divar ar meziou,  
« Glask sevel hor bugaligou,  
« Ober a-n-he bugale vad,  
« Sentuz d'hobro, d'homam, d'hozad.

19

« Ni 'bretonet lavar brema,  
« Relijuzet, chommet ama ;  
« Chommit er vro ez oc'h ganet,  
« Gant an dud vad, ez oc'h caret.

20

« Chommit da zicour hor beleien,  
« Dre ho labour hac ho peden ;  
« En eur zevel hor bugale,  
« Ho c'helen e doujans Doue. »



---

---

# EUN EURED KRISTEN E LEON

---

---

Var don *Mission Pluguën*  
Pe *Ni ho salud, Stereden vor.*

---

1

Breman kerent ha mignouned,  
Ha c'houi oll a zo en eured,  
Canomp d'hor map ha d'hor mignoun,  
Canomp d'hor merc'h a greiz caloun.

2

Deut tadou mammou da velet,  
Daou bried nevez unanet,  
Unanet dre ar garante  
Da ober bolontez Doue.

3

En ofern eo caer gulet,  
Daou zen nevez deiz ho eured,

E troad an aoter o pedi,  
Eno dirac Jesus Mari.

4

Bevit bepret en union,  
O terc'hel d'ho Relijion,  
Mirit ato lezen Doue,  
Hini 'nn Ilis hed ho pue.

5

Ha brema abarz kimiada,  
Tadou, mammou lavar ama,  
Ra vinigo 'nn aotrou Doue  
Buez an daou bried-neve.

6

Ho breudeur hag ho c'hoarezet,  
Assambles gant ho mignoured,  
Lavar da Zoue 'n ho feden,  
Ma vezint euruz da viken.

7

Ma ro Doue deoc'h bugale,  
Grit anezho tud a zoare,

Grit anezho kristenien vad,  
'Vel ma zere euz mam ha tad.

8

Kenavo priedou iaouank,  
Bevit ato pur hag hep mank,  
'Vit ma viot gant ho tud coz,  
Euruz eun deiz er Baradoz.